

eun hanter-leo tro-war-dro d'an toull e oa dihunet ha spontet an holl gant an trouz iskis-se. Den ne grede sevel er-maez eus e wele da vont da welout petra a oa a nevez, hag ar chas hag ar c'hilheien, kroget aon enno ivez, a chome motet ha mut.

Son a reas div eur, teir eur, peder eur e tour iliz Sant-Riwall, ha bep eil tro, en eur vont war zistera bep gwech evit gwir, e kendalc'he yudadennou ar bleiz ha mouez ar vombard da skigna ar strafuilh er c'hêriou tro-war-dro.

Klevet e voe holl doniou-dañs ar vro : gavotenn, jabadao, bal-a-zaou, ha me 'oar-me... Ha ton « Son ar Serjant-Major », hini « Metig, va c'harantez », hini « Apollon ha Mercurius », hini « Gwerz Santez Jenovefa a Vrabant » ha... n'ouzon ket pet all c'hoaz.

Dont a reas ivez, gant ar vombard, ton kanaouenn paotred ar menez :

E Pont-Keryao
'zo deliou fao
A zo ledan, ledan, ledan,
E Pont-Keryao
'zo deliou fao
A zo ledan ha tanao.

E Pont-Keryô
'zo deliou fô
A zo ledan, ledan, ledan,
E Pont-Keryô
'zo deliou fô
A zo ledan ha tano.

E Pont-Keryao
 'zo deliou fao
 A zo toullet ha didoullet,
 E Pont-Keryao
 'zo deliou fao
 A zo toullet gant ar glao.

E Pont-Keryô
 'zo deliou fô
 A zo toullet ha didoullet,
 E Pont-Keryô
 'zo deliou fô
 A zo toullet gant ar glô.

Met war-dro pemp eur diouz ar mintin e tavas krenn ar safar, rak ken simpl e oa aet ar soner hag ar bleiz ma kouezjont o-daou a-stok o c'horf war an douar.

*
* *

Pa zigoras Matulin e zaoulagad e welas edo gourvezet er waremm war eur vriad banal. Kalz tud a oa en-dro d'ezañ, hag anaout a reas e wreg, e vugale hag e vignoned eus Bodenna, Penn-ar-Waremmig hag ar c'hêriou-all a dro-war-dro. E-harz e dreid edo astennet ar bleiz, reut ha difiñv. N'eo ket huñvreal en devoa graet, eta !

Ar gwel hepken eus al loen milliget a reas d'ezañ ober eul lamm gant ar spont ha, dioustu, e klaskas tec'hout kuit. Met Yann ar Gall, ar paotr-biniou, hag en em gave eno ivez gant ar re-all, a lavaras d'ar paour kaez Matulin, ken distronket e dammig dremm hag hini eun den maro war ar varskaoñ : « Bez